

- 157 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

58. LUDUEN -CENDRILLON-

(follennoù 191 - 192)

Sellaouit kana, me ho ped,
 eur chanson neve komposet
 Deur c'hregig iaouank e zeo gret
 a luduen e zeo anvet.

Sao a lesse, koz luduen
 Da ficha dime eur banac'h soupen,
 tremenet an eüs de baoue dec'h
 Ne meus bed tam nemed bara sec'h

Al luduen evel ma klevas
 er fornigellik a lammas
 Ac en da kerc'hat eun ordren drein
 en avis stouva var he c'heïn

Pa voa ed da stouva var nezi
 Deuaz en eul lamp var leur an ti
 eur vech all me a kerzo
 pa velin ar vas e vond dan dro.

eun torchad lin en deus prenet
 Pemzek koënnec e bed koustet
 tri mis e bed och ho faluchat
 A tri mis all oc'h ho c'hribat

tri mis eo bed oc'h o neuza
 A tri mis all oc'h o goëza^o
 Kement se tout e ra er bloa.

^o kompren :
 gwerza

vvvvvvv

Jannet Puill, 14 janv. 1851

vvvvvvvvvvv